


Abati Landevenneg

Delwenn
sant Gwenole
x^{vet} kantved

Goulenn diazez : Penaos e veve ar venec'h e Landevenneg da vare ar Grennamzer ?

Kelc'hiad 4 – 5^{vet} klas – Galloud an aotrounez er Grennamzer



Un lec'h

- ↖ en ix^{vet} kantved
- ↖ en xiii^{vet} kantved
- ↕ hiziv an deiz



Un istor



Tan en abati An abati renevezet

Barregezhioù

- Bezañ gouest d'en em lec'hiañ en amzer hag er spas.
- Bezañ gouest da denañ titouroù resis diwar meur a seurt dielloù (testennoù, skeudennoù, enrolladennoù) evit respont d'ur goulenn resis.
- Bezañ gouest da sevel un destenn.
- Bezañ gouest da glask titouroù (skeudennoù) war ar Web.

Tro 500 goude J.-K. e oa bet savet abati Landevenneg gant sant Gwenole hag un nebeud diskibien dezhañ. N'eus abati all ebet e Breizh en deus bet un istor ken hir ha ken liammet gant istor Breizh. A-drugarez d'ar mirdi ha diwar an dismantrou bet furchet ha kempennet e c'haller ober gwelloc'h anaoudegezh gant an istor-se hiziv an deiz. Ret eo gouzout ez eus atav menec'h e Landevenneg. Er bloavezhioù 1950 e oa bet savet un abati nevez eno.




Selaout Gwenole Fauve, buhezour e mirdi Landevenneg, o kontañ deomp istor an abati.

Taol-sell war an abati

Meur a wech e oa bet kresket ha renevezet abati Landevenneg a-hed ar c'hantvedoù. Er ^v^{vet}/^{vi}^{vet} kantved ne oa nemet ur chapel. Bevañ a rae ar venec'h e-kichen. War ar memes lec'h e oa bet savet an holl savadurioù. P'o doa kroget an arkeologourien gant o furchadennoù ne welent nemet dismantroù abati ar ^{xvii}^{vet} kantved. Neuze e oa bet ret dezho toullañ ha furchal dindano hep distrujañ tamm moger ebet. Seul zonoc'h seul goshoc'h a c'haller lavaret.


An holl abatioù zo savet tamm pe damm war ar memes patrom :

- | | |
|-----------------|---------------------|
| 1 iliz | 5 sal-emvod |
| 2 kloastr | 6 sal-debriñ |
| 3 levraoueg | 7 kouskva |
| 4 lec'h-degemer | ar venec'h |
| evit ar re | 8 kegin |
| baour hag ar | 9 stalioù-labour |
| veajourien | (govel, grañjoù...) |



Implij-amzer ar venec'h hervez reolenn sant Benead

Rannet eo an devezh etre **ar pedennoù**, **al labour** hag ar vuhez pemdeziek (diskuizh, predoù, mareoù gant ar venec'h all).



- 1 eur vintin : **pedennoù en iliz (lid ar matinezoù)**.
- 2 eur : diskuizh er c'houkva.
- 3 eur hanter : **pedennoù en iliz (lid al laodez)**.
- 4 eur hanter : diskuizh er c'houkva.
- 6 eur : **pedennoù en iliz (lid prima)**.
- 6 eur hanter : emvod ar venec'h er sal-emvod. Lenn a ra an tad-abad ur pennad tennet eus ar reolenn ha displegañ a ra anezhañ. Pep manac'h a anzav e vankoù d'ar reolenn. Fiziet e vez e pep hini al labour en do d'ober a-hed an devezh.
- 7 eur : **labour er parkeier, er c'hovel, er skriptorium...**
- 9 eur : **pedennoù en iliz (lid tiera)**.
- 9 eur hanter : **labour**.
- 11 eur hanter : **pedennoù en iliz (lid sesta)**.
- Kreisteiz : pep manac'h a walc'h e benn hag e zaouarn a-raok mont ouzh taol. Pred didrouz er sal-debriñ (ur manac'h a lenn ur pennad tennet eus ar Bibl). Debriñ a reont bara ha legumaj. Tamm kig ebet.
- 1 eur goude kreisteiz : diskuizh er c'houkva pe er c'hloastr.
- 3 eur : **pedennoù en iliz (lid nona)**.
- 3 eur hanter : **labour**.
- 6 eur d'abardaez : **pedennoù en iliz (lid ar gousperoù)**.
- 6 eur hanter : koan didrouz (legumaj, frouezh, bara).
- 7 eur : ur manac'h a lenn un destenn d'ar re all.
- 7 eur hanter : **pedennoù en iliz (lid ar c'homplidoù)**.
- 8 eur noz : diskuizh er c'houkva.

Skriptorium Landevenneg

Azalek an ix^{vet} kantved, d'an nebeutañ, e oa bet savet dornskridoù e Landevenneg. D'ar poent-se ne oa ket c'hoazh eus ar moullañ, bet ijinet er xv^{vet} kantved. Pep levr a ranke bezañ eilskrivet gant an dorn. Ul labour hir e oa. Diaes eo sevel ur roll klok eus dornskridoù Landevenneg avat rak kalz anezho zo bet kollet abaoe. Diwar an nebeud a anavezomp e weler e oa niverus al levrioù relijiel : testennoù an Aviel, levrioù liderezh, deiziataerioù relijiel... Gouzout a ouzomp ivez e oa levrioù diwar-benn ar filozofiezh, an istor hag al lennegezh e levraoueg an abati. Gwir skrivagnerien a oa e-touez ar venec'h. Wrdisten* pe Gurdisten, bet tad-abad, a savas buhez sant Gwenole e latin tro 870. Hag Wrmonoc*, hini sant Paol a Leon e 884. Ul levr all zo talvoudus-kenañ : roll madoù an abati an hini eo, bet savet e 1046. *Kartular* pe *levr dielloù* a vez graet eus levrioù a seurt-se.

* Wa vez distaget evel *ou* amañ.

Ar pevar avielier tro-dro da Jezuz-Krist
Harkness Book.

An avielier sant Vaze ouzh e daol o skrivañ
evel ur manac'h er skriptorium

Eilskouer un dornskrid dalc'het e levraoueg Bodleian, en Oxford.



Ar manac'h eiler o labourat

Er skriptorium e oa menec'h karget da naetaat krec'hen loened evit sevel parchoù ganto. Goude-se e kroge an eiler da labourat. Ur wech treset linennoù war e barch e kroge da gopiañ an destenn fiziet ennañ. Gant e gontell e c'halle lemman e bluenn ha diverkañ ar fazioù graet gantañ. Menec'h all a oa karget da dresañ ar pennlizherennoù hag ar skeudennoù. Meur a zen a labourae war ar memes dornskrid. Goude-se e veze didroc'het ha keinet ar pajennoù d'ober ul levr.



Klaskomp

1. Displegit petra a ouzomp diwar-benn sant Gwenole.
2. Grit al liamm etre ar bloavezhioù merket war ar frizenn hag an darvoudoù kontet gantañ.
3. Petra a ouzomp diwar-benn skriptorium Landevenneg ?
4. Klaskit skeudennoù dornskridoù gwelevet (dornskridoù gant skeudennoù livet) war ar Web ha lakait anezho keñver-ha-keñver gant re Landevenneg. Petra a c'hallit lavaret ?
5. Perak e c'haller lavaret o doa an abatioù kement a c'halloud hag an aotrounez ?

Evit mont pelloc'h


Ho preur zo o paouez bezañ degemeret en abati Landevenneg. C'hoant en deus da vont da vanac'h. En ul lizher e kont deoc'h e vuhez nevez. Labourat a ra er skriptorium.



An istor en-dro deomp

Kaoz zo bet eus roll madoù abati Landevenneg bet savet e 1046. Ur gwir aotrou e oa eus an tad-abad. An dud a oa dindan e c'halloud a ranke paeñ tailhoù pe gwirioù dezhañ, ken evit o douaroù ken evit implijout ar vilin, ar forn... War-dro ar justis e rae an tad-abad ivez. Brudet-bras e oa sant Gwenole : sellit nag a chapelioù hag a ilizoù zo gouestlet dezhañ hep kontañ an delwennoù anezhañ. **Ha roudoù eus sant Gwenole zo en ho parrez pe en ho kumun ?**

War ar gartenn-mañ e kaver meur a anv-lec'h, en o zouez hini Landevenneg ha hini Lokenole. An daou a zegas soñj eus sant Gwenole : Landevenneg zo savet diwar ar rakger *lann* « abati » hag an anv *Devenneg*. Ur seurt lesanv bet roet d'ar sant an hini eo, bet savet diwar ar ger *gwen*. *Lok* a dalv « lec'h sakr ». Met diwezhatoc'h e oa bet krouet an anvioù-lec'h o kregiñ gant ar rakger-se (XI^{vet} kantved). Meur a rakger all zo liammet gant donedigezh ar Vretoned en Arvorig er IV^{vet}/V^{vet}/VI^{vet} kantved : *plœ* (*plou/plo/ple*) : « pobl, parrez » ; *tre* : « trev, lodenn eus ur barrez » ; *gwi(k)* : « bourk »... Klaskit orin anv ar gumun e lec'h m'emaoc'h o chom.



Da welet, da sellet...

Brendan ha sekred Kells, istor ur manac'h yaouank en abati Kells e Bro-Iwerzhon (da bellgargañ war [lec'hienn BreizhVOD](#)).

Mont da Landevenneg evit :

- gweladenniñ an dismantrou hag an diskouezadeg war istor an abati. Bep bloaz e kinnig skipailh ar mirdi un diskouezadeg nevez evit lakaat ar gaoz war un tem hag a denn da Landevenneg ;
- kemer perzh er stalioù-labour kinniget gant skipailh ar mirdi : mont war an dachenn evel ur gwir arkeologour ; enklask-polis war ur bez bet laeret ; labour er skriptorium (skrivañ gant ur bluenn ha sevel tresadennoù keltiek)... Kit war [lec'hienn an abati](#) evit gouzout hiroc'h.

© Herve Peaudecerf & TES 2018 – www.tes.bzh

Kredoù ar skeudennoù – p. 1 : delwenn, poltred gant Guillaume Team ; tresadennoù an abati gant Véronique Bardel ; dismantrou an abati, poltred gant B. Deroche ; abati nevez, poltred gant É. Blanc © www.presqu-ile-de-crozon.com – p. 2 : tresadenn an abati er XVII^{vet} kantved tennet eus *Monasticon Gallicanum* ; tresadenn devezh ar menec'h gant Malo ar Menn – p. 3 : ar pevar avieler © New York Public Library MA 115 – Digital scriptorium ; an avieler sant Vaze, poltred gant Henri Moreau CC-BY-SA 3.0 ; tresadenn ar manac'h o skrivañ gant Malo ar Menn ; p. 4 : kartenn © Rodhamine ; logo, poltredoù 1 ha 2, mirdi Landevenneg ; poltred 3 gant H. Peaudecerf.



ancienne
abbaye
Landevenneg

